

Golvañvig : Oliero Jean-Baptiste. (Lomariaker
1856 – Santez-Anna-Wened 1930). Beleg

Bet embannet e 1902. E gwenedeg.
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Taolenn

Perag e kanan-me.
En hani e garan.

Perag e kanan-me

Ton : Merlin (Barzaz Breiz).

Deit e-neùé hañv en-dro
Ged e vrageriseu d'er vro ;
Mez nen de ket e vraùite
E lak em halon leùine.

Digor e miz er boketeu,
El er bod spern gwenn e bleu ;
Mez n'en de ket e vleu gwenn e
E lak em halon leùine.

Ker sklintin e tiñs ar hleher
Ma tassion, en aod, er hreher ;
Mez n'en-de ket o boueh vraù e
E lak em halon leùine.

Er hoed braz en eined e gan
Kannenueu ker keti-ketan ;
Mez n'en de ket o han ker e
E lak em halon leùine.

Neoah me halon 'zo bleuet,
Bleuetoh eid bleu er boket ;
Me halonig neoah e gan
Gwiùoh eid en estik d'en hañv.

Me halonig beur 'lar dein-me,
'Lar dein perag e kanez-te,
Perag e kanez-te hiniù,
Ker braù, ker flourig ha ker gwiù.

Te 'houlenn perage kanan
Gwiùoh eid en estik d'en hañv.
Perag e kanan-me hiniù`
Ker braù, ker flourig ha ker gwiù.

En neb 'zo karet hag e gar
'Zo en eru baraouiz àr zouar ;
Me 'zo karet, karein e hran
Ha chetu pefrag e kanan.

En hani e garan

War don "Recteur exilé", Barzaz Breiz.

N'en-des ket gwerso-braz, e toned a bell-bro,
E-tal ur fetan gloar¹, en ur hoedig distro,
Me gleùas ur voueh vraù, ur voueh velkoniuz
E kanein ur ganenn, ur ganenn druhéuz.

Me gleùas ur plahig e kanein hirvouduz
Kanennig he halon, ur han karantéuz,
Hag, àr ur bod freskon, einig en Eutru Doué
D'er plahig glaharet d'e dro e ziskane.

En hani e garan e hra dein huanadein,
Huanadein noz ha de', de' ha noz hirvoudein ;
Rag-se choñjet em-es, eid dizammein m'inean,
Seüel ur sonennig d'en hani e garan.

En hani e garan n'en-des den àr en douar,
N'en-des na tad na mamm, n'en-des na kar na par ;
Kollet en-des e dud ag en oed tenerrañ,
Ur heih inevad e en hani e garan.

En hani e garan 'zo dreist en oll baotred,
N'en-des hani hañval 'meid ma vehe êled ;
Meid ma vehe êled en Eutru Doué, en neañ,
N'en-des hani hañval d'en hani e garan.

En hani e garan en-des deu zornig gwenn,
Bleù melen el en eur distenned penn-der-benn ;
Braù e boueh en estik, er hoedig glaz pe gan,
Mez gwell e genein boueh en hani e garan.

En hani e garan en-des deulagad luemm²,
Pe daol àrnein ur sell, me halonig a duemm³ ;
Flour e hoarh goleu-de', pe saù d'en neùe-hañv,
Mez flourroh e minhoarh en hani e garan.

En hani e garan gwaherall em hare,
Kan' e ree pe ganen, pe ouelen e ouele ;
E galon ha m'hani ne hreent nameid unan,
Pe oe bihan er gêr en hani e garan.

En hani e garan bremen 'des ma laosket,
Oeit e d'er broieü pell, d'ur vro n'anaüan ket,
Oeit e d'er broieü pell de hounid tud d'en neañ :
Kollet, kollet e dein en hani e garan.

¹ ur fetan gloar : ur feunteun fresk.

² luemm : lemm.

³ me halonig a duemm : ma halonig a domma.

D'en ahni e garan ne hran 'meid hirvoudein.
Penaoz ker pell dohton e hellein-me bivein ?
Mez petar 'lavarar-me ? Turlebannein e htan,
Dre hit choñjal ataù en hani e garan.

D'en hani e garan, mar kollan-me me fenn,
Einedigeu, er hoed, kanet-c'hwi ho kanenn ;
Eined, kanet er hoed, kanet keti-ketan :
Karante', karante' d'en hani e garan.

D'en hani e garan e kanan kenavo,
Kenavo aveid mad, betag ma yein d'on bro,
Betag ma yeien d'on bro, de ranteleh en neañv ;
Eno 'vo e kavein en hani e garan.

D'en hani e garan ne hran 'medi huanadein,
Huanadein noz-ha-de', de'-ha-noz hirvoudein ;
Rag-sen em-es saùet ha rag-se e kana
Kanennig me halon d'en hani e garan.